

# FEIZ HA BREIZ,

## KELOU A BEP BRO, HA KENTELIOU VAR BEP TRA,

Digasset bep sul da guement Christen a goms ar brezounee.

### Conditionou evit caout ar Gazeten :

Evit ar FINISTER, COSTEZ-AN-NORD hag ar MORBIHAN : evit eur bloas, daou scouet. Evit c'huec'h miz, pevarzec real.— Evit an departamanchou all : evit eur bloas, seis lur. — Ne vezo mui roet ar Gazeten evit tri miz. — An abonamant a gomans en deis kenta euz ar miz e pehini e vezo bet goulenet (nemet ar c'hontrol a ve merket.) — An abonamant a dle beza paet araog caout ar gazeten. — An ditres a dle beza merket sclar ha freaz. — An hini ne zigas ket en dro ar c'henta gazeten a receo goude ma zeo echu he abonamant, a zo consideret evel abonet a nevez. — An deis ma c'hechu an abonamant a vezo merket var an adres.

An abonamant a guemerer e ti an Aotrou KERANGAL, mouller an Escopti, ru ar Guiguerez, n° 18, e Kemper. D'an Aotrou KERANGAL epken e tleer adressi ar peamanchou ha kement a zell oc'h servich ar Gazeten.

Ar scrijoun da lacat er Gazeten a dleer da adressi, evel diaraog, d'an Aotrou MORVAN epken.

KEMPER, 8 Eost 1868.

Doe ne les morse an den ep he zigoll euz ar vad a ra. He recompansi a ra er bed-ma pe er bed all. Ar broiou ive, ar bobl euz a eur c'harter a vez digollet gantha euz ar vad a reont. Ho digoll a ra o rei dezho gant largentez madou an douar, hag avechou e ro dezho c'hoas guelloc'h, ho laca da zigeri ho daoulagad d'ar selerijen euz ar virionez pa vez ar bopl-ze o veva e tenvalijen an errol.

Setu petra velomp brema e Brozaos. Bep sizun ema ar c'hazetennou o comz a dud euz ar vro-ze distroet ous Doue, distroet d'an ilis catolik, hag ez eus leac'h da gridi e ro Doue ar c'hras-ze dezho abalamour d'ar vad o deus great d'an Eskibien, d'ar veleien ha d'ar gatoliked all tec'het di euz a Frans e mare an dispac'h. Ar re-ma a voue great dezho eno eun digemer euz ar guella. Evel n'o doa gallet cas netra gantho euz ho bro, o devoa ive izomfa bep tra, lojeis, bevans, dillad d'en em c'holo. Tud vad a bourvee da gementse oll. Dont a reat a ziarben dezho ; goulenn a reat digantho a betra o devoa izom ; pourchas a reat evitho lojamanchou, dillad ha bouet, hag evitho da zigonezout a gantchou, e cavent oll tud da gemeret soursi anezho. Var an hent zoken e velet tud pinvidig o tont da ginnik repu dezho en ho manerion, en ho c'hestel, o paea ho beach evitho, o lacat arc'hant dezho en ho dorn, en ho godellou, ha pa lavare unan beunnag en doa peadra avoalc'h, her pedent da gas an arc'hant-se d'he vreudeur izomek.

Setu penauz e lakea Doue an eneou mad da zicour an dud keiz harluet-ze, ha penauz e recompans hirio ho madoberourien o lacat tud ar vro da zigeri ho daoulagad d'ar virionez. Ha ne deo ket brema epken eo e comans da ober kementse, azalek ma rojont digemer en ho bro d'an dud harluet, e comansaz ive evitho ar recompans euz ar vad a reant. Rag an Eskibien hag ar veleien eat di a reas cals vad er vro-ze, a lakeaz aleiz a dud da zigeri ho daoulagad, a devaz abenn, dre ho c'homzou, dre ho c'henteliou, dre ar skuer vad a roent, dre ho buez vertuzus, d'ho

lacaat da gaout istim evit ar relijion catolig o doa casseat bete neuze. Ha ma na lakejont ket eun niver braz da zistrei oc'h Doue var an heur, e lakejont da viana had mad en douar-ze hag e preparjont an hent d'ar re a dlie costi goudeze.

Evelse ar vad a rer d'an nessa a denera calon Doue hag a laca he drugarcz da goeza var eur vro. Ar memes maderleze evit ar re a c'houzaon poan pe baourentez a denera ive calon an dud, hag aliez hor missionerien a c'hounit muioc'h a eneou da Zone dre ar vad a reont d'ar re izomek, dre ar soursi a gemeront euz ar re-glan, evit na reont dre ho frezegennou. Eun Escop missioner a lavare, n'eus ket pell, var ugent soudart protestant a deue d'an hospitaliou en he vission, trivac'h a varve catoliked, gounezet d'ar feiz dre ar soursi carantezuz a gemere ar c'hoarezet anezho, ha dre ar c'homzou mad a glevant gantho. Var gementse e comze, dreist ar re all, euz eun ofiser eoz a voue digasset d'an hospital dare da vervel.

An den-ze n'en doa relijion ebet, pe da viana ne heuille nicun. Ar c'hoar carget anezhan a lavaras dezhan. « N'oc'h eus ket pell da veva, sonjit e Doue ! » An den clan a respontas : « Daoungent vloas so n'em eus ket sonjet enha ; petra zonec'ho deoc'h a rafe ganeme ? N'hen anavezan nemeur, hag hen, me voar vad, n'em anavez ket cals ken nebeut. » Ar c'hoar ne gollas ket a gourach evit kementse « red eo, emezhi, ec'h anavessac'h Doue ; eun tad mad eo. » hag en em lakeas neuze d'her scolia guella ma c'helle. Goudeze e c'houlennas digantha :

— Pe gatolik pe brotestand oc'h-hu ?

— Ne ouzon ket cals ; cridi a ran evelato oun protestant.

— Kerc'het e vezo eur belek catolik var ho tro ?

— A be relijion oc'h-hu, va c'hoar ?

— Euz ar relijion catolik-ta !

— Oh ! neuze, kerc'hit din eur belek catolik.

Ar c'hoar a redas neuze da glask eur belek. Hema pa voa digonezet, a c'houlennaz oc'h an ofiser :

— Cridi a rit-hu ez euz eun Doue ?

— Ia, cridi a ran ez euz eun Doue hag en deus gret ar hed-ma.  
 — Cridi a rit-hu ez euz tri ferson e Doue ?  
 — Ne ouzon dare. — Ar beleg en em laca neuze da gomz a vister an Dreindet. Ar c'hlanavour a dro oc'h ar c'hoar, hag a lavar dezhi :  
 — Cridi a rit-hu an dra-ze, c'hui ?  
 — Ia sur, eme ar c'hoar.  
 — Mad, eme an ofiser, me a gred ive neuze.  
 Ar beleg a reas goulennoù outan divar henn mister an incarnation, mister ar redemption hag ar guirionezou all red da c'houzout evit beza salvet, hag a c'houlenne oc'h ar c'hoar hag hi a grede an traou-ze ; hag evel ma lavare ho c'hrede a greis calon, hen a responte ive hep tro ho c'hrede evelahi.  
 Ar guirionezou kenta euz ar relijion a voue hano anezho an eil varlerc'h eben, hag an ofiser a reaz evelse profession a feiz var ger ar c'hoar-ze : hag ar pez a reaz dezhan cridi eo m'en doa gueleat ar c'hoar-ze o kemeret kement a hoan gantha, ma lavare ne alle ket beza ar gaon gant tud ker caractezus, ne alle beza ker mad-ze nemet ar re so Doue hag ar virionez gantho.  
 Setu penaz e teu ar vad a rer d'an nessa da c'honnit calon an dud evel ma teu da c'honnit calon Doue.

En Itali, evel a verkemp er sizun all, e voa arneun ha ghaocier braz epad ma voa re a zec'hor er vro-ma. Brema ervez ar c'heleier an amzer so deut da veza caer eno ive, hag e vezo gallet savetei an eost, da viana en loden vad anezhan.

Dont a ra ato zouavet nevez da Rom, hag en ho zonez tud iaouang euz an huella ligoez. Ar prios a Spagn ma comzemp anezhan er sizun dremenet, a zo eur skiner evit an oll zouavet all. Devot eo evel eun zel, ha ne fell ket dezhan e ve gret guelloc'h dezhan evit d'he gamaradet.

Bez'ez euz ato eneoù mad hag a zioner ho danvez evit seour hon Tad Santel ar Pap en he izom. N'eus ket pell eun den pinvidik a lakea eas dezhan daou c'hant mil lur, ha ne ket falvezet dezhan en em rei da anaout, ne ket falvezet dezhan zoken e vouezie ar Pap digant piou e teue dezhan an arc'hant-ze.

Enl lizer euz a Rom, o comz euz ar goal amzer zo het eno, a lavar ez eus dre eno carterioù hag a so fall an ear enl-o. En douaron-ze gouzoud ez euz ed, mes an eost a rank beza gret bolan, en eis pe zek dervez. Ma chom al labourerien hirroc'h evit an dra-ze da gempen an eost, ez eus danjer evitho da baea an dieien o denz ed en douaron-ze a so red dezho kemeret tud avoalc'h evit oher ho eost en eis pe nao dervez. Ma ve red dezho derc'hel ho labourerien eun dervez pe zaou outpen, e rankfent paea d'ho labourerien evit an dervez pe an daou zervez-ze hirroc'h eget a roont dezho evit an eis pe an dek dervez kenta.

Eun itron nobl euz a vrozoas so distroet oc'h Doue en derveziou tremet. An itron-ze a ioa o veac'h en Itali gant oll dud he zi. Ar c'hras a scoaz he c'halon e Napl, hag e

tiskuez euz c'hoant bras da zont d'an ilis catolik. Eur beleg euz ar Chin, a so e scolach Napl hag a voar coms ar saoz, a voue carget da zeski dezhi guirionezou ar feiz. Goude e tenas da Sorrant, hag eno e bet recevet er guir ilis gant arc'hescop ar ger-ze. Ac'hano e scrife d'ar beleg en doa he c'heleionnet :

« Setu me erlin recevet e kerc'h en ma mam an ilis catolik. Savet eo eun, hag e valeen en hent ma zoun lakeat enha gant madelez Doue. Va nec'hamanchouso eaf ebion. Eleac'h an enerez a zanten em eus cavet ar peoc'h.

Gouzout a ran e rai ar c'helou-ma plijadur deoc'h, hag her scrifan deoc'h evit ho trugarecat euz ar garantez hag ar vadelez oc'h eus bet evidhon.... »

« Pedit, ha lakit pedit evidon, evit va fried ha va bugale, ma teuint ive eun deis d'ar guir ilis, dindan ar guir bastor. Pedit evidon ma talc'hin mad ha start d'am relijion, ma na deuin ket da drei divar an hent mad, ha ma c'hlanzavin e peb amzer ar guir feiz ha pa ve zoken divar gonst va buez. »

Evel ma roer er mare-ma ar prizion d'ar vugale eo oll scoleton, oc'h eanan ama va c'heleier, evit caout plas da zaou bennad serit digaset din divarben ar prizion roet e diou euz ar scoleton ama a dost, hini Santez Mari hag hini Kerfenteun.  
 G. M.

**Rann, pe Distribution ar Prizon e Skol ar Frered e Kemper.**

Deut eo eta ann amzer ma ve laket eunn termen d'ar c'hentellion enn tier-skol. Hoghen a-raok ma ve roet konje d'ar skolaerien da vont d'ar ghear, e ve rannet ar prizion, da lavaret eo, e ve roet levriou nevez, binvioù ha traoù all kaer hag a hriz, d'ar re ho deuz studiet mad ha trec'h et ho c'hamaraded e-pad ar bloaz.

D'an drede war-n-ughent euz a viz gonere eo het gret ar ceremoni-ze e ti-skol Santez-Mari e Kemper. Ar frered n'ho deuz espernet na poan, na labour, na dispign evit lakât ann deiz-ze da veza eunn deiz a levezet evid ar vugale, ann tadou, ar mammou hag evel holl ar re a oa deut da welout ha da glevout kement a zo het gret ha lavaret enn deiz-ze. Kals a dud, hag euz a Ghemper hag euz ar c'heriou tro-war-dro, en em gave eno dastumet, hag ho deuz bet, me gred, e-leiz a blijadur. Rak eunn dudî vraz e oa klevout lod euz ar skolaerien-ze o tiviza hag o kana ker kaer.

Ann aotrou Prefet a zalc'he ar c'henta renk er ceremoni-ze. Eunn he ghichen e oa azezet ann aotrou'n Eskop, ann aotrou Mer ha kalz a dud all euz ar renk hueta.

A-raok ma eo het roet ar prizion, ar prefet a zo het savet, ha gand eur vouez sklear ha nerzuz en deuz lavaret ar c'honziou war-lerc'h :

« Aotrou'n Eskop hag c'houi oll Aotronez,

« Gand pebez joa en em gavann-me hirio enn ti-skol-man, a ia bepred gwelloc'h-well. Ar skol-man e deuz e commanct eunn eunn amzer ann bezo sonj anezhi keit a ha ma revinn.

« A viskoaz ann dud pinvidik diwar ar meaz a zigasse ho bugale da Ghemper, evit continui hag sichui ar studi commanct er ghear gant ho zad pe gant eur mestr-skol-hennak. Mes gwech-all, ho c'herent, o veza ne gavent lec'h e-bed gwelloc'h, ho lekeo e pansion e tier tud distar ha paour pe eun hostalirion e traoù e kear. Eno e vijent tri pe bevar o kousket eunn eur memes kamb, aliez bouz ha noazuz d'ar iec'hed.  
 « Ouz-penn, er seurt tier-ze e kollent, siouaz ! eun mad a priciusoc'h c'hoaz eghet ar iec'hed. Koll a reant an eunder a spered hag ar burete euz ar galoun. Hag evit gwir, petra a welent hag a glevet-hi enn hostalirion-ze ? Aliez en em gavent eno gant tud vezo, ha tud a lavare dira-ze-ho komziou a enep d'ar vertuz ha d'ar religion. Ann darn-vuia anezho ne oant ket evid eun em virout e-kreiz kompagnunezou ken direz.  
 « Gonde daou pe dri bloaz tremenet evel-se e kear, al likez a zistree d'ar ghear trist ha digaloun, hep beza disket netra. Ne gasse aliez gant-han d'ar ghear nemed ar merk en doa kollet kement hel lekeo da dalvezout dirag ann dud, lie henor hag he trud vad.

« Hag e o gvelet e Breiz-lzel dizurziou ken kriz hag ken direz eun eunn amzer ne oa hano enn-han nemed e euz a zeskadurez evid ann holl, hag euz a zereadeghez e e-teuz ann dud euz a hep stad hag a bep condition !

« Er bloaz 1837 eur prefet, a zo sonj anezhan e calounnou anaoctek ann ti-skol-man, hag eunn Eskop en deuz va dighemeret aliez gant kalz a vadelez, en em glevaz etre-ze-ho evit klask remed da eunn hevelep droeg.

« Adaleg ar moument-ze eo deut hano da sevel eunn ti braz a vice recevet eun-han ar vugale diwar ar meaz, evit kaout eun-han pep mad evit ar c'hoar hag ann ene.  
 « An tadou hag ar mammou christen a sentaz gant hast ha joa euz ar prefet hag euz ann aotrou'n Eskop, eun eur zigas ho bugale d'ann ti-skol-ze nevez-savet ; hag evel-se, eunn niver braz a vugale a zo miret da vont da goll e kear gand ar gwall exemplou ha skourerion fall.

« Er penn kenta ar vugale a zo deut enn ho raok, ne oant ket lojet evel ma-ze-oc'h hirio ann deiz, va migoundet iaouank. Red e oa neuze sonjal hepken eun traoù muia necesser. Holl ar skolaerien a chome neuze eun eunn ti enk-meurbed ha nebeud caret. Ne oa nemet nerz ha bolontez stard ar frered mad-man a gheleud ac'hanoch, a elle dont a-henn da sevel ann ti kaer-man, ho'ch euz eun-han eunn ear ker iac'huz.  
 « Ac'hano c'hoaz ho taoulagad a bar war ann douarou hag ar parkeier ho'ch euz lezet evid eunn amzer, hag e tistroot d'ezho eunn deiz, chenchet e tud nevez dre ann descadurez hag ann douarou a laka ar vuez da veza kaeroc'h ha dousoch.

« Presanz ann aotrou'n Eskop er ceremoni-man, presanz ann holl dud all diredet d'ar gonel-man, hag ho'ch euz e klevet breman o c'hoarzin hag o stlaka ann daouarn gant joa pa ho peuz aman divizet ha kanet ker kaer, e kement-se holl a ziskouez ar garantez a zouger d'e-

« hoc'h, bugale iaouank. Ra chomo eta bepred eun ho spered ar sonj euz ann deiz kaer-man ; ra vezo evit peb hini ac'hanoch evel eur c'huzulier mad eun ho puez pen-da-benn. Va bugale geaz, goude ho studi enn ti-man, ah ! diwallit da sonjal dilezel ho parkeier hag ho pro, evit mont d'ar broiou pell da glask pinvidigheuz ha plijadurezou vean ha trompluz. Kredit ac'hano, chomit enn ho pro, c'hoant war ar meaz, evel-t'ho kerent ; na zilezti ket ti ho tud evit redek di-hont ha du-man warlerc'h madon ha plijadurezou ne gaver e nep lec'h ker koulz ha war ar meaz. Ann douarou labourer gand ho kerent, ha war berez oc'h ganet, ha n'ho deus-hi ket a-walc'h a zudi evid ho terc'hel er ghear ? Ha n'ho deus-hi ket a-walc'h e donsoerion evid ho pinvidiket ? Arabat eo e teufe ar gheleudurez a gavt aman d'ho lakât da zisprizout al labouriou diwar ar meaz ha da zilezel stad ar re ho deuz roet d'e-ho'ch ar vuez. Ra zeuio kentoc'h d'ho tougheuz da hennia skouer ho kerent, da ghemer lod enn ho labouriou teno ha kalet, ha d'ho dic'hano euz ar boaz a ghemeront hag ann dispignou a reout e evid-hoc'h enn ho pugealech !

« Bugale da labourerien douar, ra vezo eunn henor evid-hoc'h ho-unan beza labourerien douar d'ho tro !  
 « C'hui a vezo muio'ch desket war ann doare da labourât eghet re all. C'hui a skigno eta eun ho pro ann doare reon mad ha talvouduz da labourât ha da ghempienn ann douar. Chozet ha galvet oc'h het evit-se. Ar gouarnamant a zeske d'e-hoc'h ann doareou-ze gand eur mestr, a c'houzoc'h ar pez a dal be gheleudion, e kerkouz ha me va-unan. Continuit da brofita euz he skol ; hag evit diskouez d'e-hoc'h, va bugale, e ar stad a rann euz ar seurt deskadurez-ze, me fell d'in va-unan rei pevar levr kaer d'ar re ho devezo bet muio'ch a skiant hag a galoun war ghemet-se.

« Aotrou Mear, ha c'hui frered ker, me en em gav eunn da renta testi en aman evid ar mad a ra ar skol euz ann ti-man. Ar pez a rit aman a ro d'e-hoc'h lec'h da veza trugareket gand ho skolaerien, gand ho famillou ha gand holl dud ar vro. Dalec'hit-mad da sevel tud kalounek, tud honest, tud a religion ha labourerien vad. Lavarit d'ho skolaerien peghen doughet eo kaloun ho Impalaer evid ann dud diwar ar meaz. Desket hoc'h euz d'ezho er c'harout, rak-se e kredann e trido bepred ho kalounou o klevout ar c'hri a unanaz ho tadou, pa en em gavaz hon bro ker a Franc eun danjer d'en em goll. *Vie ann Impalaer !*  
 M. D.

*Skol verc'hed dalc'het gant Seurezed Kerfenteun.*

**GOUEL DISTRIBESION AR PRISCHOC.**

Dal lun, 27 a viz guere, Seurezed Kerfenteun, a Gougression ar Spered-Santel, hanvet peun liessa Seurezed guen, ho deuz gret en ho zi gonel distribution ar prischou d'ho skolezere. Calz tadou, mamou,

kerend ha mignoned a oa diredet d'ar gouel-ze euz ar pansion tro var dro. Hep gaou, skol Seurezed Kerfeunteun a gont hirio eun daou c'hant bennag a vugalez. Ar skol-ze a zo savet aloune eur bloaveziou bennac; ma, n'euz ket ouспен pemp bloaz m'eo bet ret c'heski an ti abalamour ma c'eske an niver euz ar skolerzed. N'euz fors, setu an ti deud adare da veza re vilhan. Den na ole heza souezet gant kement-se, rag ar seurezed a zalc'h skol Kerfeunteun a zo eur ar re zeske, hag ar zouris a guemeront gand ho bugalez, an aked a lekont da ziski d'ezho lenn, skriva, counta, da rei d'ezho descadurez var ar c'hatekiz ha var bep seurt labourou stam ha griat, azo anavezet mad gand an holl. Gouta ouzont dreist-holl gounit calponno ho bugalez ha lacaat er pennou caleta hag er sperejou ar mui stouvet eun tam descadurez bennac. Hep mar ebet, ma kendalc'h an niver euz ho skolerzed da greski bep bloaz, e vezo red d'ezho ive c'heski ho zi-skol evel m'ho deuz renket hen ober Breudeur Pansion Santez-Mari.

An Aotrou Boby de la Chapelle, Prefed nevez ar Finister, a zo bed er bloa-ma Prezidant gouel ar prischou e ti-skol Breudeur Santez Mari. Kement-se a zo bed eun enor braz euid ar skol-ze. An Aotrou N Escop a zo bed ive er bloa-ma Prezidant distribution ar prischou e skol Seurezed Kerfeunteun. Da zec heur cleier ar barrez ha cloc'h ar skol ho deuz lavaret dre ho bole hag ho mouez lizin ec'h arvee an Aotrou N Escop en he garroz. Dioc'h-tu an Aotrou Bollere, person, an Aotrou Danion, mear, hag ar Seurez Sant Gabriel, *superiorez Kerfeunteun a zo deud d'hen diguemeret* var leur-guear an iliz. Eun niver braz a dud a oa en em unnet gant-ho.

Gant peguement a respod pephini ne d'eo ket daoulinet dindan dorn ar Pastor kenta evit reseo he venedicision!

Ac'hane an Aotrou N Escop a zo cat da zal ar prischou, zal ficheet en eur mod an dudiussa gand ar Seurezed hag ar vugalez. Eun theatr a oa savet er penn luella euz ar zal, ha var an theatr-se e oa renket cadoriou euid an Aotrou N Escop hag an dud enorapla euz ar gompagnunez. Tro var dro d'ar zal e velet stiguet guirlantezed euz ar re vrava, ha taolennou paper scrivet gand ar vugalez ha gant kemend a barfeted ma vije lavaret e oant moulet. An taolennou-ze a lavare selear e oamp pella pell braz euz an amzer e pehini tud a zo ad avoalc'h d'en em bompadi dre ne ouient ket scriva ho hano var digarez ma oant pinvidic.

Gonde eun taol lagad roet var an taolennou scrivet-se, an Aotrou N Escop a zo zzezet, a diou verc'hig, euz ar re vilhana, a zo deud d'her zaludi, ha da guinnic d'ezhan eur ganaonen great en he enor, hag evit hen trugarecaat. Dioc'h-tu teir pe beder verc'h brassoc'hic a zo savet en ho zao, hag ho deuz canet ar ganaouen-ma.

Menlomp oll, ha hepred  
Hon Tad, hon Escop caret! } bis.

E penn ker braz Escopi  
Laket gand hor Salver,  
C'hui oar cavet amzer,  
Da visita bep hini.

Ha c'hui zo eun Tad tener,  
Carantouz menbet!  
Dond a rit chor gaelet,  
Ni bugale ken dister.

Evel d'an dimezeled  
Savet er c'houchou  
E prizit rei prischou  
Er scoliou peizantezed.

Menlomp oll, ha hepred  
Hon Tad, hon Escop caret!

Compladou ar ganaouen-ze a zo bet canet gand ar teir pe beder verc'hic choazet evit ho c'hana, ha gonde peb coublad an oll vugalez a zave ho mouezion euid cana an discann. Selear e oa evit pephini e ie ar ganaouen con hag eon da galon an Escop, rag ar joa a oa scrivet var he vizech.

Evel-se ive ez eo savet en he zao goude ar ganaouen hag en deuz comzet evel-en d'ar vugalez: « ho trugare-  
« caat a ran, va bugalez, euid ar pez ho c'h' euz lavaret  
« d'in en ho ganaouen. Ia, ia, gnr eo em euz kemend a  
« hijadur etouez ar vugalez divar ar mezion, evel e  
« touez bugalez ar c'herion; hag euid her prout d'e-  
« hoc'h, he prometant, dirag an holl, dont d'ho buetet  
« adare pa vezo c'h distro en ti-ma goude ar vacansou;  
« ha neuze, he roin da beplini ac'hanoch, bihan ha  
« braz, eur vedalen. »

Pa ho deuz clevet ar vugalez ar bromessa-se ho deuz straket ho daouarn a galon vad.

Neuze an Aotrou N Escop a zo azezet a nevez, hag unan a Gureed Kerfeunteun, an Aotrou Seveno, a zo savet en he sao hag, a vonez freaz hag huel, en deuz hanvet ar vugalez ho d'oa gounezet prischou. Calz a zo bet hanvet er vech ha diou, mes darn a zo bet hanvet betec 6 ha 7 conch. Enor da holl verc'hedigou skol Kerfeunteun, mes ispisial d'ar re-ma:

Kenta Class.

Jeanne Grooters, Marie-Jeanne Jezequel ha Léontina Louis.

Eil Glass.

Marie-Louisa Danion ha Catherina Ar C'hoz.

Trede Class.

Franseza Bothorel, Anna Niger, Mari Angant, Perrina Jézequel ha Perrina Normant.

Eun dudi a oa goulet an evrusted a luguerne e daoulagad ar mammou pa vijent pedet da rei ho frischou d'ho bugalez ha da lacaat d'ezho ho ho zal ar guronen a enor. Lenn a hellet neuze e calon ar mammou-ze. Mear a hini a oa ken evruz ha marteze e varussoc'h euid ho bugalez; ia, hen assuri a hellomp, eun amzer ma oan e buguel, ne oa ket em larrez eur skol evel skol Kerfeunteun! me ive em bije gallet diski lenn, scriva ha

Tad, c'hui ne rit kem ebet  
Tre paour ha pinvidic  
Hag ar re reuzedie  
Zo ivez ho mignoned.

Ho palez a zo hepred  
Da bep hini digor,  
Piou en deuz var ho tor  
Biscoaz en amzer scoet?

Bevit, Tad mui caret,  
Gant vloaz var an douar;  
Ra vezo c'h en he c'hoar  
Gant Doue diguemeret!

« labourat evel va merc'h. Oh! calz pinvidicoc'h e vijen  
« bet hirio gant descadurez va merc'h, euid gand ar  
« c'hant pe an daou c'hant skoued ho deuz dispignet  
« nebeutoc'h gan-hen, va zad ha va mam. An arc'hant,  
« guir eo, a zo eun dra bennac; mes an descadurez a  
« zo calz en tu-all! » ALEXANDR, Chalouini.

BREMA HA GUECHALL.

Tom ha tom 'ta ma'ez eo brema an amzer, ha kaer an heol euz ar muint d'an noz, ar zaout keiz, stemmet hag hegazet gant ar c'heliien, a gall ho fenn, a ia e breskin, a fouet ho c'horf gant ho lostou, hag a lamm dreist an drefen, dreist ar c'haou, ar c'hension..., a red, a red, a fring, a darc'honez, o klask a bep tu freskadurez, eun nebedik bean, eun tammik peoc'h evit ho ler, ho c'hro-c'hen. Hogen, kaer ho d'euz an traou paour kerzed, ha roial, ha galopad, ar c'heliien ho beuil, hag ho broud, hag ho de ve peb leac'h, betek en ho c'breier. Betek en ho c'breier ar zaont a clamp a vers kemend, ma vez mil foan oc'h ho goro, ma koust d'ar merc'hed paka ho zesion, ma rank, dioc'h ho lavar, ar merc'hed, ken koz, ken iaonank, pe c'hini nousep ar veach, pe c'hini e peb giz hag e peb vez, abarz tenna euz ho zesion eur c'hoz banne leaz. A ra stank garden var ho zavacheron, pe a ia da c'hoazi *koulou* e mesk ar c'helo, e mesk an teil, kentoc'h eget depord ma tremeno dre ar zil en eun tam podoz.

Mad, mad, sellit... gant meur a gristen, gant eur c'hroz a gristenien e c'hoarvez brema stank ha stank evel gant hor zaont. Kredit ac'hano, mar kirrit... hag hen ober a reot hep dale... ha ne ket en hanv hepken eo ez a hor c'hristenien e breskin dic'hor zaont, mez ivez er goany, mez pa vez mui dic'hoabu an amzer, mez pa vez skorn hag erc'h var an douar.

Klevit neuze... Petra' zo eta a nevez adarre gant Lan An Dall? Ha n'eo ket an dro-ma trevariet spereit al labourer koz?

Oh! nan, n'eo ket c'hoaz, a drugare Doue... Depordit c'hoaz eun tachad abarz he gondaoni, abarz sevel ho tiskoz oc'h he gveled.

Ne ket kelien evel ato, nan, nan, siouaz! eo a grog brema e ler eur rummad kristenien, eo a c'hoaz en tan en ho c'hroc'hen... Vasooc'h, calz vasooc'h brezel ho d'euz eget hor zaont... Eun diaoul benak, meur a ziaoul eo a zo en ho c'breiz, hag ho laka da vond var ho c'hement all, da ober nousep an dra dizoare, divalo.

Lan An Dall hag he gamarad a lavare doec'h, n'euz ket pell, e sav, e stanka a reiz da reiz, var ar meaz evel e kear, var ar meaz da heul kear, eun orin kanfardet, briz Bretoned, eun lastez kristenien, a zebri big guener ha sadorn, koraz ha digoraz, a ra friko druz, dioc'h ma vez tro, dioc'h ho galloud, eun darn abalamour m'ho d'euz kalonou ner tost d'ho stomogou bleizi, ha darn all abalamour ma fell dezho diskouez en ho giz n'ho d'euz aon ne rak ho skeud, na rak komzo, gourdrizou ho belecien.

Kement-se n'eo ket avoalc'h, n'eo ket anter evit-ho. Da oll c'hoaz c'hemennou Doue, da oll lezennou an iliz eo e rankont ober brezel; an oll gurec'hemennou, an oll lezennou a zo bet great evit ho mad eo a glaskont da vresa dindan ho zred, evit ober guelloc'h ho fenn, ho iout ho unan. Guelit betek ar vugale vilhan a zo c'hoaz en ho zae, klevit betek ar vugale ne ouzont ket c'hoaz c'hoazez ho fuz a zoare vad, klevit pe seurt komzo a zeu divar ho muzellou, peger bras, peger stank, peger c'honek ec'h ouzont distaga *briz, double, nondé, tonner de...* An oll gaosiou pouner a goueze guechall var an henchon braz euz a c'hinoe eun nebedik ehaloterien anter chata... evesait pegeu abref ec'h var enem gemered oc'h Doue bugaleon a zo c'hoaz ar penn kenta euz ho fater da zaski... Peger gros, peger louz, pegeu udur e teu da veza teodon eun darn merc'hed ho unan, pegement a hezion divalo a oar da vresa paka nousep ar plac'h iaonank, bezet e mesk ar gerezed, er parkerier, var al leuriou, e kreiz endramm, a heiz dourna, en eur vond d'ar foarion, d'ar pardonien... Guelit eta peger stank, peger stank e teu da veza a beplin an tromprierien, ar flouterien, al laeron flour hag h'elvar... A bet an den, a bet ar plac'h, ar vaonez a vez brema tizet, guerez, c'houliet er stalion, er marc'hajo, gant ar viche-rourien, gant ar guader, gant ar c'h'alvez, an loez, gant ar c'h'emener, ar gemenez... A bet an tam coton a vez guerez evel seiz, ha seiz ar goulla... A bet an ane- val faoutz a vez tremenet evit lonaed n'euz ket par dezho var an douar... A bet an dornal treaz a vez silet e goueled ar zac'h dindan an *had fin*... A bet an tam treuz- jen gaol, a bet an tam torch listri a vez lizez brao ha koant e mesk ar piladon amann!... Guir eo, n'euz mui nemeur a laeron braz, evel guechall, kuzet er... el lanneier, e kreiz ar balan, o tepord ma teudo da drem- men tud ar foar, reud ho godel, arc'hant hag zour en ho gouriz... evit lammed var ho chouk da heul an de- valijen, e marc an noz, prest da ziskar gant eur penn haz, da voga eire ho daouarn, dindan ho daoulin, da laza gant eur gontel lenn ar re a c'hoaz derc'hel d'ho zra, ha kas d'ar gear ar pez ho d'euz touc'het, gounezet en eur foar, eur marc'had... Nan, nan, re a henchou ledan a zo brema... Nan, nan; aoun a zo rak an arche- rien... Nan, nan; n'euz mui a c'h'olo nemer var bord eun darn distroennou a ioa guechal ken anavezet, ker brudet... Honestiz avoalc'h a zo brema hag e traonien Kerne, hag er Prat ledan, hag e Pont an Iliz, hag e coat Toall-Zac'h, hag e diskenn Sant Herve... Mez nag a varc'hadoresiou savet, livet, kemmesket, a veler mui- oc'h-mui e peb leac'h!... Nag a zouarn flour, ha guenn, ha manegat, a oar brema en em zila betek dindan ho kreiz evit he denna divar ho kein!... Nag a didigou paour a veler a-zeiz-da-zeiz o prena da notronien pouner, o testum berniou danvez, o prena ar c'haerra atanchou var ar meaz, ar c'hoanta manerion e kear!

Guechall eun den honest n'eo d'oa nemet he c'her... Guechall, stank ha stank ec'h hellet kouta var gomz eur c'hristen... Brema, kaer zo mound dirak noter, kaer zo



la, var dreujou ar maner, ma vezo distro he Olier. Azoric a zo en he c'hichen; hema a zao he benn hag a dro he fri oc'h an avel. An hini goz a zell outhan hag a lavar: Azoric keaz, maro e vezimp hon daou abarz ma vezo distro ! »

Evelse e cane Olier evit caout berroc'h an amzer. Epad m'edo o cana, Elvira, merc'h ar c'hount a Vedros a ioa o pouten e jardin ar maner etouez ar roz hag ar bokedou a bep seurt. Ha setu hi o clevet eur vouez o cana var eun ton clemmuz, hag ar vouez-se a ioa evel pa deuje euz a zindan an douar. Ractal e skoas eun taol en he c'haloun; ha setu hi da dostaat ouz ar prizoun, ha, dre ma tostea, ar vouez a deue selearroc'h ha fraessoc'h betec he diouseoarn, hag ar c'homzou a gane a iea dounnoc'h-dounna en he c'haloun. O veza clevet ar c'homzou diveza: « Siouas ! piou a lavar dinn etc », hag ar rema a ententas mad, e devoue muioc'h-mui a druez ouz ar prizounier, hag e lavaras outhi he unan: « paour keaz prizounier, nag a c'h'lac'har en deuz o sonjal en he vagerez coz hag en he gi fidel; mes ar c'h'lac'har-ze ne bado mui pell; nan, me ia da lavaret eur ger d'am zad. »

G. MORVAN, person Pluguën.

(Eur pennad all er zizun a zeu.)

### KELEIER.

An Aotrou de la Boixière, person Sant Cadou, so maer sizun dremenet.

Dissul, nao euz ar miz, e roer an urziou e Kemper.

D'an tregont a vis guengolo e vezo gouel braz e Santez Anna Vened. Skeuden pe imach Santez Anna a vezo curunet, hag imach he merc'h ar Vere'hez.

Dissadorn eus bet eis dez eo coezet ar gurun var Gastel Pont-'n-Abat. hag en deus great eno a bep seurt c'hoariou evel ma zeo boas da ober, ama o tistaga morzol an borolach, ahont o vont a dreuz eur voger deo, en eul leac'h all o lacat eun daol zero e pillou, oc'h ober evelse eun tam distruch bennag dre gement leac'h ma tremene.

Lavaret a rer d'an dud divar ar meaz ne dlesent ket lezel ar chatal da efa dour eleac'h ma vez bet lin pe ganab o toura. N'eus ket goassoc'h evit an dour divar lin pe ganab o lacat al loenet da glenvel.

Ervez *Cazeten ar Meziou* ez eus discar var an ed e pep leac'h. An east, e meur a garter, so guelloc'h evit na zonjet, hag an amzer so caer d'he gempen.

Euz a di ar missionou diaveas bro, e Pariz, ez euz eat adarre en hent eis missioner nevez. An Aotrou Faur, a Escopti Lyon hag an Aotrou Brochenet a Escopti Dijon, evit Pondichery; an Aotrou Chevillard, a Escopti Naonet, an Aotrou D'hont ive a Escopti Naonet, hag an Aotrou Barreteau a Escopti Luçon, evit missionou Siam; an Aotrou Coste a Escopti Montpellier, evit mission Hong-Kong; An Aotrou Pettier, a Escopti Roazon, hag an Aotrou Salmon, a Escopti Bourj, evit ar Japon.

Ervez *cazetennou Rom*, an niver euz an dud so o chom er gær-ze a so cresket a zaou vil abaoue varlene. Bez'ez eus brema enbi daou c'hant seitek mil tric'hant trivac'h ha triugent den.

Mad e ve marteze digas adarre da zonch da lennerien *Feiz ha Breiz* eo d'an deis kenta a viz here brema ec'h eano da veza recevet er c'henvers ar peziou arc'hant bihan coz, peziou a eis real, pevar real, dek guennek, pevar guennek. Ar gouarnamant gouscoude ho c'hemero bete fin ar bloas. Ar peziou ne vezint mui mad eo ar re zo cossoc'h evit ar bloas 1864. Ar peziou so bet teuzet er bloas 1864 hag ar re so bet teuzet abaoue a gendalc'ho da veza mad evel kent.

N'eus ket pell, e kær Namur, e recevet en hospital eur vaouez coz, oajet a bevar bloaz ha cant, mes c'hoaz cre hag he skiant mad ganthi. Ar vaouez-ze so gae meurbet ha dalc'h mad he c'hlever o cana. Gouscoude en derveziou kenta ma voa deut d'an hospital, e veze trist avechou, ha bep en amzer en em lakea da vouela.

Unan euz ar c'hoarezet a gemer soursi euz ar re goz hag euz ar re glan a c'houlennaz outhi:

— Petra ra nec'h deoc'h-ta, mam goz, ma tirollit evelse da vouela avechou?

— Ah ! va Doue, va c'hoar, dalc'h mad, ha dreist oll en noz, e teu da zonch din eus va fotrik bihan n'en deus brema den d'he gas ha d'he zigas !

— Ha pe oad en deuz ar potrik-ze deoc'h ?

— Ema gant he bemp bloaz ha pevar ugent.

Eur c'hemener a gasse en dez all he vevel da c'houlenn arc'hant e ti eun den pinvidik eleac'h ma vanket eun dra bennag dezhan. An den pinvidig a lavar d'ar mevel kemener: — Petra, aoun en deus da vestr na dec'hennet kuit ?

— Oh ne ket, eme ar mevel, va mestr eo a ia da dec'het kuit, hag en deus c'hoant da gaout he arc'hant da gas gantha.

G. M.

### PRIZ AN ED.

KEMPER. — 1<sup>er</sup> East.

Priz ar c'hant lur.

Guinis.... 44 lur, 74 c.

Segal..... 9 lur, 87 c.

Eiz..... 9 lur, 48 c.

Ed-du.... 44 lur, 45 c.

Kerc'h.... 9 lur, 96 c.

Avalou-douar 5 lur, « c.

PONT-NABAT. — 50 Gouere.

Priz ar c'hant lur.

Guinis.... 45 lur, « c.

Segal..... 40 lur, « c.

Eiz..... 8 lur, 43 c.

Ed-du.... 43 lur, 33 c.

Kerc'h.... 40 lur, « c.

Avalou-douar 4 lur, 25 c.

Ar Gerant: AR. DE KERANGAL.

Kemper, moulet gand AR. DE KERANGAL, Mouleir an Escopti.